



GANTIQ SPIRITUEL, EN HENOR D'AN ITRON VARI AR GOZ-YEAUDEF.

Var ton : Noel, Pastoret.

TAUD ETERNEL, me o supli
Da zont brêmâ d'am exoci :
Ar c'hiaç a c'houlennâñ da ober
Eur vers a vo spirituel.
Gloar da Verc'hes ar Gos-Yeaudet,
Melodi d'he Mab benig'et.

Me goins déch a ur plac santel
Zo situet en Bac-Leguer.
En henor d'ar Verc'hes Vari,
Ar g'enta ilis so grêt dezi.
Gloar d'ar Verc'hes, etc.

Hep choqi bro nac escopti,
Assur en Treg'er emedi
An anciena plac santel
D'ar Verc'hes sacr, mam hor Zalver.
Gloar d'ar Verc'hes, etc.
Er bla daouzec ha tri-ug'ent,

Goude maro Roue ar zent,
 E oue batisset ar Yeaudet,
 En honor d'e vam benig'et.
Gloar d'ar Verc'hes, etc.

Dre an ali un den santel
 E tisqennas en Breis-izel
 Qenta escop en Lexobi,
 Disqib Joseph Arimathi.
Gloar d'ar Verc'hes, etc.

Dre Vro-Saos e oa tremenet.
 Breis-meur oa d'ar c'houls-se hanvet;
 E Montroulez e tisqennas,
 Ha tout eno a govertissas.
Gloar d'ar Verc'hes, etc.

An den santel-se, Drenalus,
 Zo deut a benn, dre c'hraç Jesus.
 Da govertissa oll Montroulez,
 En se vad hac en santelez.
Gloar d'ar Verc'hes, etc.

Neuse e eure e Montroulez
 Un ilis gaer da Sant Jacques,
 Ha batissa er ru Feunteun
 Eur groas hanvet Croas al Letern.
Gloar d'ar Verc'hes, etc.

Da Lexobi e teuas neuse,
 Da brezeg'i lezen Doue;
 Graç Doue dre e sermoniou,
 A douche o oll c'halonou.
Gloar d'ar Verc'hes, etc.

Pa voant gantàn convertisset,

E savas ilis ar Yeaudet ;
 E cassas neuse eul liser
 Da escop an Naonet, Sant-Clær.
 Gloar d'ar Verc'hes , etc.

Sant Lin a oa pab d'ar c'houls-se
 Er gær a Rom , dre urz Doue ,
 En devoe joa bras o clêvet
 E oa Drenalus er Yeaudet.
 Gloar d'ar Verc'hes , etc.

Revelet a re ma Doue
 D'an tri den santel bemde
 Prezec d'ar bobl ar guir lezen ,
 Hac ar relijion gristen.
 Gloar d'ar Verc'hes , etc.

Vitellus a voa ive neuse
 Impalaer e Rom d'ar c'houls-se ,
 Hac a vassacre ar gristenien
 Abalamour d'o guir lezen.
 Gloar d'ar Verc'hes , etc.

Goude an tirant-se e teuas
 Impalaer Constantin ar bras ,
 Hac a lesas ar gristenien
 Da zerc'hel mat d'o guir lezen.
 Gloar d'ar Verc'hes , etc.

Goude maro'n trou Sant Lin ;
 Oe pab e Rom , dre c'hraç divin
 An den santel Melchidias ,
 Choaset gant Doue dre e c'hraç.
 Gloar d'ar Verc'hes , etc.

Ennes en devoa consacret

Gunael escop er Yeaudet,
 E hanvas ilis cathedral,
 E c'houde d'an disqibien all.
 Gloar d'ar Verc'hes, etc.

Pa oe Gunael consacret
 Escop ebars er Goz-Yeaudet,
 E commandas lemel er mes
 An idolet eus an ties.
 Gloar d'ar Verc'hes, etc.

Hac ober cavet en pep ti
 Un imach eus ar Grucifi;
 Ar Verc'hes, ar Famill santel,
 Portrejou an oll Ebrestel.
 Gloar d'ar Verc'hes, etc.

Nobr bras a esqeb a so bet
 En Lexobi, er Goz-Yeaudet:
 Daouzec escop ha tri-ug'ent,
 Erve rapport buez ar zent.
 Gloar d'ar Verches, etc.

Sant Tual i've a so bet
 Escop ebars er Goz-Yeaudet:
 Sant Hogmel ha Sant Ruellen,
 Hac un nombr bras a sent ouspen.
 Gloar d'ar Verc'hes, etc.

C'hoec'h blas ha tri-ug'ent eo bet
 Sant Tual escop er Yeaudet,
 Hac eno e oe enterret
 Gant peb henor ha peb respet.
 Gloar d'ar Verc'hes, etc.

Goude e eure miraclou,

Ma oe savet e religou:

Ar re-se a oe sovetet,

Pa oe Lexobi distrujet.

Gloar d'ar Verc'hes, etc.

Pa oe distrujet Lexobi,

Oa Caranus escop enni,

Er bla seis cant unan ha seis,

Erve`ma rapport Histor Breis.

Gloar d'ar Verc'hes, etc.

Hasterin a deuas gant listri

Eus an Danemarck da Lexobi,

Hac en deus - v assiejet

Gant pévar mil a zoudardet.

Gloar d'ar Verc'hes, etc.

Nao mis e oe ncuse gante,

O clasq abordi varneze;

Pa n'alle qet antren enni,

En deus concluet he dévi.

Gloar d'ar Verc'hes, etc.

An habitantet eus a gær,

Pa en em voelont en danjer,

O deus-sonjet en em renta,

En esperanç treti ganta.

Gloar d'ar Verc'hes, etc.

Hasterin, an tirant cruel,

Evel ma antreas en qær,

A gommanças da vassacri

Ar gristenien dre m'o c'hiſi.

Gloar d'ar Verc'hes, etc.

Goude e pillas an oll>vadou,

Dens an ilis an tensoriou;
 Nemet religou Sant Tual,
 Ec'h ejont oll gant an dud fal.
 Gloar d'ar Verc'hes, etc.

Ar re-se a oe sovetet,
 Da Chartr en Bauç e oent casset,
 Gant an escop-se Caranus,
 Evel miracl, dre graç Jesus.
 Gloar d'ar Verc'hes, etc.

A Dol e teuas un arme
 Da ober dê mont ac'hane;
 Mes, allas! pa int aruet,
 E oa Lexobi distrujet.

Goude, Caranus a varvas,
 Er gær a Frang e tecedas,
 Hac e chomas ar Goz-Yeaudet
 Neuse hep caout escop ebet.
 Gloar d'ar Verc'hes, etc.

Ar prinç Momen, roue en Dol,
 Pa voelet' escopti o col,
 A hanvas Gratien escop
 En Treg'er da c'houarn ar bobl.
 Gloar d'ar Verc'hes, etc.

Gratien a c'houleñnas neuse
 Permission ous ar roue
 Da chanch a blaç d'e escopti,
 Pa oa distrujet Lexobi.
 Gloar d'ar Verc'hes, etc.

Accordet oe dezàn ar c'hraç,
 En couent Trecor e chomas,

Peini, erve ma lenner,
 Oa commançamant Landreg'er.
 Gloar d'ar Verc'hes, etc.

An templ santel ar Gos-Yeaudet
 A oe neuse abandonet;
 Mes Doue ne dourvee qet
 E vize da viqen dilezet.
 Gloar d'ar Verc'hes, etc.

Inspiret oe an otrou Treg'er
 Da reformi an templ santel,
 En avantach ar vretonet
 Eo un tenzor caer ar Yeaudet.
 Gloar d'ar Verc'hes, etc.

Eno ema ar guir sourcen,
 Ha ne finisso birviqen;
 Graçou divin demeus an ên
 Evit ar c'hoif hac an ene.
 Gloar d'ar Verc'hes, etc.

Me ne sitan mirac'l ebet
 Eus ar re so grêt er Goz-Yeaudet:
 Eur mis antier nen deo netra
 D'o raporti ha d'o scrifa.
 Gloar d'ar Verc'hes, etc.

Er Yeaudet ez eus remejou
 Ep mar ous pep sort clevejou;
 Ous pep danjer ha pep annui,
 Preservet eo nep a deui di.
 Gloar d'ar Verc'hes, etc.

Mar re Doue d'ar c'horf yec'het,
 Dre c'hraç ar Verc'hes ar Yeaudet,

Ê rê c'hoas d'an eneou
Remission d'ar pec'hejou.
Gloar d'ar Verc'hes, etc.

Induljançou so accordet,
Perpetuite d'ar Gos-Yeaudet ;
Ha d'o gonit cals a amzer,
Epad ar mis mae en antier.
Gloar d'ar Verc'hes, etc.

Nombr a c'hraçou so accordet
Dreist ar plaçou all d'ar Yeaudet ;
Epad eur mis cren ar pardon :
Demp. da chonit remission.
Gloar d'ar Verc'hes ar Goz-Yeaudet,
Melodi d'he Mab benig'et.

A M E N.

Lexovy. Coz-gueaudet. Kær distrujet, a behini an historianet cos a gomz. Bez oa situet diou léo a Lannion, hag a so bet ar c'henta sich episcopal a Landreg'er, e pelêc'h eus bet daouzec escop ha tri-ug'ent; da lavaret eo, a dalec ar c'henta cantvet, e pehini oe etablisset, bete an naovet, ma oe distrujet ar gær-se gant an Danoaïs.

Remerq an Imprimer.

E Montroulez, e ti LÉDAN, e ru ar VUR,